

Chanson Nevez

VAR SUJET AR BREZEL

Var ton : *Quimiad ar Gard mobil eus a barres Trégromm.*

Er blavez dec a tri-uguent, goude an trivac'h-cant,
Bars e rouantelez Franc n'ens nemet chagrin a fourmant ;
Eus a guement zo bars en Franc hag a lenn Gazeteier
Na velont nemet esperanc da gresqui hor miser.

Homan zo eun affer drist evidomp preparet
Tre ar bobl demeus a Franc hag ar Prussianet,
Me saver réquisicion betec daou-uguent vloa
Pa nomp quet mest domp on-hunan a vo ret dimp partia

O ! Bretonet a Vreis-Isell, mesquomp-ni on daëlou !
Breman e velan facil e vo ret dimp partiou,
Vit moned da gombati d'eus ar Prussianet :
Goassoc'h int evit bourevien hag an holl tirantet.

Neus quet mui a blijadur, c'hui voar va mignonet,
Bars e rouanteles Franc gant ar Prussianet ;
Mes petra eo din da zonzal a da gonsideri,
Hint ne maïnt quet ive bars eun heuret ganeomp-ni.

Mar mefe bet an ners evel m'en doa Sampson,
Pe autrament ar furnes en devoa Salomon,
Pe an discadures eus ar profet Daniel,
Me occupfe ma speret var sujet ar brezel.

Balamour da Napoleon n'eus on abandonnet,
En quemen façon zo tout omp brema revinet ;
Deus quement-all a dud vel ma zo bet lazet
Or bara eus tre on daouarn vo diganeomp tenet.

Cab voa an Napoleon d'or gouarn pendaben
N'em ro d'ar Prussianet gant daou-uguent mil den,
C'hoas e teu da lavaret, roc e voa partiet :
« C'hetu aze va rouantelez, — hag hi dija revinet, —

« Mont e ran da lavaret queno deoc'hu brema Francichen,
« Me meus ho gouarnet mad pad eur bloa var-n'uguent. »
Ia, quement-se a zo guir pa ran reflexion,
No peso guel gouarnamant vit ini Napoleon.

Mes brema eo bet eun ingrat, eun traitour, non andret,
Ho tont d'on abandoni pa oamp ar muia jenet ;
Laquet en d'heus a c'hanomp en creis en oll viserion ;
Ar bresel hag ar guernes en d'eus laquet var n'omp

Laquet en d'eus ac'hanomp 'tre daouarn ho bourevien,
Ne voa nemet Doue ebquen capabl d'ho nem difen ;
Basaine, er memes tra, general d'eus ar Franc,
A so deut d'on abandonni, hag om boa enan fisianç,

Poset oa e Metz, en Lorraine, n'eur guer fortifièet,
A gantan c'hœc'h-uguent mil demeus a soudardet,
Ia gantan c'hœc'h-uguent mil a soudardet vaillant,
N'ho dijent biquen collet a nes en d'eus bet c'hoant.

Pa oa Guillaume, roue ar Pruss, ho poz e ganonniou
Bazine lare de soudardet rinça ho fusuliou ;
Cetu e peseurt guis e coller ar victoriou :
Dificil eo combatti gant sabl divar 'n'enchou.

Ma speret a ma c'horf zo bet e n'em gonsultet
Hag e lar din eo echu plijadurezou ar bed ;
N'eus nemet trahisonou bars e rouantelez
Cazi impossubl eo d'an den sicour e tam buez.

O ! mes ministret ar brezel zo ive traïtourien
Voar digueri an dorejou 'vit hon adversourien ,
Ar generalet ive oar guerzo ho zrouplou
Vit caout an tu da lavaret ven tapet er prisoniou.

Clevet ma contam deoc'h, 'man var journal ar bares,
A werse tri-uguent mil den, evit eur scouet dre bez ;
Setu pe guis e teuer a ben d'or c'has da sistruji,
E guis cas an denvet er c'hoat d'ar blezi da sevari.

Partiet eo an dud yaouank betec daou-uguent vloa
Memes vit ar re dimeet dout an urs memestra ;
Hones a vo ar viser e lec'h ar gonsolacion,
Pa vo guelelet ar vugale leset en abandon.

Ia hones vo eun anquen hag eur velanconi,
Pa vo guelelet ar priejou tont d'en em guinviadi ;
Ne chomo quen bars er guer nemet ar groagues kristen,
Da vouela a da seplori gant ho bugale vien.

An tadou hag ar mamou so bemdes o teplori,
Kinviadi demeus ho bugale, martese n'ho guelfont mui,
Hag ar groagues bars er guer, gant o bugale vien,
Vo abandonet gant o sud, na vo den d'ho souten.

Clevet ar gri hag ar c'himiad ebars er rouanteles,
Ranna e ra hor c'halonou gant an dritidigues ;
Silaouit ar journaliou var sujet hon soudardet,
Pere a gont deomp ive doareou ar Prussianet :

Dre lec'h ma sint passet ho deus laset, devet,
Ma veler ar vugaligou, guis bandennachou denvet,
En eur destum assambles vit bale trop ar meneo,
A ! quement a so christen gle e galon creno.

Abalamour d'an dra-se seo red dimp partial,
Kemeromp c'hoas esperanç, ne chomomp quiet ep tridal,
Partiomp pa seo ret, ma breudeuret christen,
A mar gallomp ni rei mes d'ar general Basaine.

Pedomp Doue d'or sicour quent mont var en dispac,
Evit me c'halimp pontou ar prussian Bismark,
A courachomp-ta, pa seo ret, e tresomp Francisien
Hag e c'heomp c'hoas da velet mar guelomp n'eur difen.

Avançomp or begou a deomp-ni d'ar vresel
Da c'hout a ni allo attaqui on ennemi mortel,
Lampomp eta var nese evel c'hass arrajet,
Rac en tol man vo ret deomp col pet gonet.

Mes an den a guemer ar garg demeus ar c'houarmant
Glê bea guis eur belec, pa ve ho prononç sermant,
A na dese quen urs d'en am stormi d'eus ar bed,
Hac ursou ar Gouarnamant sortial ne gleont quiet.

Peotramant guis eur sœurs pa ve receo an urso,
A ve gret ho interramant araoc ma vent maro,
O deve renoncet d'ar bed evit servicha Doue,
Hag ursou ar Gouarnamant gle bea er stad-se.

A c'hoas e fotefet d'in, bars ma ve just al lesen,
Vefe tallet ar pris da bep condition ;
Ouspen e pedan anesan bars monet var an trôn
Ober eun act a gotricion ebars en he galon.

Vit ma respecto an oll ben pe heï bars en he dy,
Rac badiant an den paour a so couls hac e hiny ;
C'hoas e fotefe din, pa ve goulet mouechou
E sinfe dimp gant e goad e ve guir e gomsou.

A divoualet e teufe d'ober eun drahison
Er guis e n'eunt bet gret Basaine a Napoleon
An eïl evel eguile ho d'eus guerzet ar vro
Malhos eta varnese ne c'houlomp quet ho distro.

Mar colomp an dud a ilis er guis m'a so lavaret,
Neuse e varvo peb-hini ebars en e pec'het,
Mes an ini en d'ho gret eun act a gotricion
Halfe Doue en pardoni, m'en goulen a greïs calon.

Dreaman ben pe varv eun den a rer cals a ganvou ;
Er bresel vit maro mil den ne rer quet intermanchou ;
Eno, pa ve fin dar gombat, an oll dud decedet
A interer a neso assambles gant ho c'hesec.

Homan so eur bunission deut deomp a bers Doue,
Collet e voant gant ar gloar ha gant ar vanite ;
Memes ar groagues christen, evel o bugale,
Goude bea gret o beach mad sicouret gant Doue.

Bep eis pe bep pensec de na vije met grandeuriou,
A Doue e c'hunan e oa gannet en eur c'hraou ;
Baoue eur pennat amser n'a velomp met grandeuriou,
An hini ne ra quet gant e sanve ra gant e viscamanchou.

Mes poent eo dimp, ma breudeur paour, digor on daou lagad
Da selet tresec an env, leac'h mam Doue an tad ;
Ia, poent eo dimp tenna ar sonj d'eus ar vanite,
A guelomp c'hoas ma so moyen da soveta on ine.

Pedomp ar Verc'hes Vari hag e mab biniguet
Vit besa eurus bars er bed all pa simp divoar ar bed,
Neuse n'ho po quet aoun ebet evit monet d'ar maro
Ma vemp sur da vesa curunet gant Doue en envo.

An hini en d'eus gret ar sonn ma a so brema decedet,
Pempsec de roc e voa maro en devoa e c'homposet ;
Rac-se ta, me o supli, quemeromp ar volonte
Da laret ped a *De profundis* vit repos de ine.

LOUIS AR POUENOT,

Eus a baros Gourin.

